



D'an Otrou Trehiou

eskob Gwened



Evit e oferen nevez a eskop
en Tresigne
30 Even 1929

Testeni a anaoudegez vad.

ROC'HLANN.

I

War don : Zao, Breiz Izel

En parrouz Tresigne ni 'ghev sklent ar c'hleier :
Eun diskan dispar a ziston zeder.

DISKAN Zon, Zon !
 Zon, kloc'h ma badeiant,
Dreist ar meneiou strink da vouez ken drant.
 Zon !
 Da vouez leun a c'hened
'Vo mouez ma Breiz e klevin en Gwened.

Gantè war ribl al Lenf a zav ar c'han laouen
A drid dudius a-hed ar zaouen.

Kan d'an Otrou Trehiou, eskob nevez, zavet
War drôn zant Patern da ren Bro Gwened.

En kreiz ar c'hân zantel ni glev mouez dous eur vamm
He gwestl ha peden eur beleg dinam.

Bolzennou an Illiz, an tour dentelezet
E tihun ennê mouez eun tad karet.

Peb den 'verv e galon peb tra a gav zoniou :
Ine Breiz a gan d'an Otrou Trehiou.

II

War don : *Margeitig ha Loeizig*

Setu dreist ar zoniou a zav eus ar Gwelo
A dremen eun hirvoud henvel euz eur c'hanvo.

Kleier ar Wir-Zikour, Zant Brieg, Landreger
A voud haga zon gour en kreiz an noz pounner.

En o moueziou a glem kalon eur pastor mad :
Klemmou an holl a lar : « Perag 'ta hon kuitât ? »

Lein ar menciou du, oh ! chilaouet, breuder,
'Vel eul luskellerez, mouezig eur c'hloc'h dister.

Dihunet gant eskel éle Zantez Annan
Kloc'hig Plouguernevez a zon eus ar c'haeran.

« Schet hou tareu dru, ha taveit, Bretoned,
Hou peleg kaloneg hiniù n'hou kuita ket.

« E Breih n'eus 'meit ur vro, nen des meit ur galon :
Chetu bermen sterdet hon harante guizion.

« Fetan en tri Eskob é red hoah 'hed er run :
Etre Dol ha Guened é ma stennet ar fun ! »

En Breiz Zantez Annan hag an Otrou Tréhiou
Euz ar wir garanté a viro ar greiou.

III

War don : *Dalc'h sonj*

Dalc'h sonj ! beleg Gwelo, Kerne, Treger
Euz kelen an Otrou Tréhiou :
Fe grenv, harp Doue, ha karante skler !
Dalc'h sonj euz e holl genteliou.
Dalc'h sonj, Kristen Breiz, dindan zam da zever,
Kristen mad a gar da vugale :
N'eus met eun tenzor hag a dalv da breder :
Eun tad hag eur vam a gar Doue.

Dalc'h sonj, Gwenedour, den a nezz kalet,
Difennour gwir ar Zantelez,
Da bastor nevez, biken diskaret,
Da viro war hent ar furnez.
Ha mar 'teu ar spont en kalon kristen Breiz
Hen a vo krenv en kreiz ar brezel,
'Vel gwechall da zent evel hon " Charles Bleiz "
'Vit Breiz, 'vit Doue **Kentoh merüel.**

Dalc'h sonj, Tressigne deuz an devez man,
Devez kaer an holl enoriou.
En kalon peb bugel 'daleg breman
Skriv hano an Otrou Tréhiou.
Ha dreist an amzer, dreist an holl blavezioù.
Mir envor euz da holl beleien.
Da hano bepred 'touez en holl parrouziou
A lugerno 'vel eur stereden.

9 Even 1929.

ROC'HLANN.



